

## Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pet truez doc'homp ! (bis)  
Roit deomp ar peoc'h !

## Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an hini a lam pec'hed ar bed :  
Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,  
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

## Komunion :

1 Daet eo a lein an neañv,  
Na pezh ur vadelezh  
'Veit magiñ hon eneañv  
Ha reiñ dezhi ar peoc'h.

2 Ô Jezuz, hor Salver,  
Ni 'gred e gwirionez  
Eh oc'h àr an Aoter  
Hag 'vel den hag 'vel Doue.

4 Salver karantezus,  
Resevet hon daeroù ;  
Bet doc'homp trueus,  
Pardonit hor faotoù.

**Jezuz zo diskennet  
'Veidomp àr an Aoter,  
Adoromp get resped  
Hon Doue lan a zouster.**

3 Ni a zeli krediñ  
Deusto n'ho kwelomp ket ;  
Hani n'hell fariñ  
A p'hoc'h eus C'hwi komzet.

5 Bremañ, ô Doue santel,  
E vennomp ho kariñ ;  
Kentoc'h mil gwezh mervel  
Aveit ho ofañsiñ.

6 C'hwi 'zo hor c'hoñfortañs  
Er vro-mañ a dristez ;  
C'hwi 'vo hor rekompañs  
E rouantelezh an ne.

## 'Cit kloziñ an oferenn :

*Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :*

**R/ : Ha get ho spered !**

*Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :*

*An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.*

**R/ : Amen !**

*Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver :*

**R/ : Bennozh da Zoue !**

## Kan-dibenn :

1 Dirak ho relegoù sakret,  
Santez Anna, Rouanez hor bro,  
Setu-ni c'hoazh ur wezh tolpet,  
Tolpet 'eit lâret kenavo.

2 Mar hon kuita ho relegoù,  
Ho krasoù geneomp a chomo  
'Pad hon buhez en dañjerioù,  
A lein an neañv, c'hwi hon gouarno.

3 Doc'h an daol santel liesoc'h  
E tostaompda glask ar vuhez,  
Ha kerzhet a reomp gredusoc'h  
Àr an hent a gondui d'an ne.

**Overennoù brezhonek : pep sul ketañ ar miz (10e30)**

**Perc'hinded ar Vrezhonegerion : 7 a viz Imbril (ebrel) da 11e**

# Parrez Ker Anna

3e Sul ar C'hoareiz

3 a viz Meurzh 2021

1<sup>h</sup> lenn. : Erm 20, 1-17

2<sup>l</sup> lenn. : Ko 1,12-25

Aviel : Yn 2,13-25

« *Ar gred aveit ho ti am debro-me* »

## Kan digor :

**Mall-bras eo din, pec'hour,**

**Distroñ doc'h ma C'hroueour ! (2 wezh)**

Ha c'hwi 'venn atav dispriziñ,  
Bouezh ar C'hroueour, Mestr holl ar bed ?  
Emañ gwerso doc'h ho kalviñ :  
Chom a reit-c'hwi bouar bepred ?

Goude ma 'n deus Doue ho Kroueet  
Dre vadelezh ha karantez,  
Hañval 'vehe eh oc'h er bed  
'Veit gober poan dezhañ bemdez !

Er stad ma 'n em gavit hiriv,  
Eneañ dispartiet doc'h Doue,  
Seblant e zo geneoc'h bout bev,  
Ha c'hwi 'zo marv e gwirionez.

Devat ho Toue, dait get glac'har  
Hag 'n em daolit àr e galon :  
Rak ho Tad eo, hag hep arvar  
D'ar prodig e ray ar pardon.

## Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad  
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

**Respont : Ha get ho spered !**

**Confiteor : Me anzav dirak Doue holl-gelloudek ha dirazoc'h, ma breuder,  
am eus pec'het bras dre soñj, dre gomz, dre ober ha dre vank a ober : dre  
man gwall, dre man gwall, dre man brasañ gwall.**

**Rak-se e c'houlennan get an Intron Vari bepred gwerc'hez, get an Aeled  
ha get an holl Sent, ha geneoc'h-c'hwi, ma breuder, pediñ Doue aveidon.**

## Kyrie

**Lennadenn getañ :** *En deizioù-se e lâras Doue an holl komzoù-mañ en ul  
lâret : «Me eo an Aotrou, da Zoue, en deus da dennet a vro-Ejipt, a di ar sklaved.  
N'az po ken Doue nemedon. Na zistagi ket anv an Aotrou, da Zoue, evit ket; ne vo ket*

kuit e-keñver an Aotrou an neb a zistago ma anv evit ket. Bez soñj a zeiz ar sabad evit e santelaat. Enor da dad ha da vamm evit beviñ pell àr an douar en deus an Aotrou, da Zoue, roet dit. Na vi ket multrer. Na vi ket avoultrer. Na vi ket laer. Ne zougi ket a faos-testoni a-enep da nesañ. Ne c'hoantai ket ki da nesañ, ne c'hoantai ket gwreg da nesañ nag e servitour, nag e vatezh, nag e ejon nag e azen, na netra a gement a zo dezhañ.». Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

### **Psalm 18 : Aotrou, geneoc'h emañ komzoù ar vuhez peurbadus.**

Peurvrat eo Lezenn an Aotrou, buhez evit an eneañv,  
gwirion eo testoni an Aotrou, furnezh evit an dud eeun.

*Reizh eo gourc'hemennoù an Aotrou, levenez d'ar galon,  
glan eo urzhioù an Aotrou, sklerijenn evit an daoulagad.*

Pur eo doujañs an Aotrou, divrall da holl viken,  
gwirion eo divizoù an Aotrou, ken reizh an eil hag egile.

*Da c'hoantaat muioc'h evit an aour, evit aour fin e-leizh,  
c'hwec'h aveit mel ar ruskenn, evit chug an terennoù.*

**Cil lennadenn :** Mam breuder, ha pand eo ar Yuzevion é c'houlenn burzhudoù hag ar C'hresianed é klask furnezh, ni avat a bredeg ur C'hrist bet staget doc'h ar Groaz, skandal evit ar Yuzevion, follezh evit ar Jentiled; met evit ar re galvet, Yuzevion pe C'hresianed, emañ ar C'hrist galloud ha furnezh a Zoue. Rak follezh Doue a zo furoc'h evit furnezh an dud, ha gwannder Doue a zo kreñvoc'h evit kreñvder an dud. Setu komz an Aotrou Doue : R/ : Bennozh da Zoue !

### **Aviel :**

**Komz peurbadus ag an Tad : gloar deoc'h-C'hwi, Jezuz-Krist !**

**Komz peurbadus ag an Tad : gloar deoc'h-Chwi, hor buhez !**

*Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : R/ : Ha get ho spered.*

*Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Yehann.*

**R/ : Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

*'Vel ma tostae Pask ar Yuzevion, Jezuz a bignas da Jeruzalem. Kavet a reas en Templ ar werzherion ec'hen, deñved ha kloumed, hag an drokerion-moneiz en o c'hoazez. Ha goude bout graet ur fouet get kordaj, eñ d'o skarzhiñ holl er-maez ag an templ, int, o deñved hag o ec'hen; da strevelliñ moneiz an drokerion ha da chench penn d'o zaolioù. Ha d'ar werzherion koulmed e lâras : «Kasit kement-se ac'halemañ, ha na rit ket un ti-koñwerzh a di ma Zad.»*

*Neuze e tas soñj d'e zisiplad emañ bet skrivet : «Ar gred evit ho ti am debro-me.*

*Ar Yuzevion avat a savas o mouezh hag a lâras dezhañ : «Peseurt sin a ziskouezez deomp evit gallet gober kement-se ?» Ha Jezuz da respont ha da lâret dezhe : «Diskarit an Templ-mañ hag e-korf tri deiz me en adsavo.» Neuze ar Yuzevion a lâras : «C'hwec'h vlez ha daou-ugent en deus padet sevel an Templ-mañ, ha te en adsavo e-korf tri deiz ?» Met eñ a gomze a dempl e korf.*

*Neuze, pa oa adsavet a-douezh ar re varv, e taas soñj d'e zisiplad en devoe lâret an dra-se, hag int a gredas er Skritur hag er gomz bet diskleriet get Jezuz.*

*E-pad ma oa e Jeruzalem get gouel ar Pask, e kredas kalz en e anv, é welet ar sinoù a rae. Met eñ, Jezuz, ne fizie ket enne dre ma o anave holl, ha dre n'en devoa*

*ket dober en dehe bet roet unan bennak testoni dezhañ diàr-benn an den, rak eñ e-unan a ouie petra a oa e-barzh an den.*

En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :

**R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

**Kredo :** Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, deuet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e teuy da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez beurbadus.

### **Pedenn hollbedel :**

**Aotrou Doue, en ho madelezh, selaout hor pedennoù !**

**Lid ar profoù :** ar beleg : *Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

**R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.**

### **Prefas :**

*Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :*

**R/ : Ha get ho spered !**

*Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :*

**R/ : Emañ troet trema Doue !**

*Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :*

**R/ : Just ha santel eo !**

### **Santel : Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !**

Lan eo get ho kloar an neañv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Ra vo benniget an hani az a e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an ne !**

### **Gorreoù : Ra vo meulet !**

### **Hon Tad :**

hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet,

Ho rouantelezh degaset deomp,

Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.

Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,

Pardonit deomp hor pec'hedoù,

'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,

Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion

Met hon diwallit doc'h an droug.

*Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :*

**R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**

### **Lid ar peoc'h :**

*Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.*

*Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h.*

**R/ : Ha get ho spered !**